

m

A

n

l

Amzer ar vezh zo achu

F

ES

T

O

ni,

i z i L i

**AR STROLLAD TUD
YAOUANK,**

1. A ziviz

gallout krediñ hunvreal asambles ha ne
verzañ tra ebet ouzhimp

2. A rdio

evel ma fell deomp – da bep rummad d’e
zoare

3. A ziskler

bezañ troet war-zu an dazont, pozitivel
hag evit an holl

4. A fell

deomp en em santfe pep Breizhad.ez fier
hag emskiant eus e.he sevenadur hag
eus e.he yezhoù

5. **A d'ped**

e vefe ofisiel hor yezh, berzoù ar Stad-
C'hall a fell deomp sikour da lakaat war-
wel ha bezañ dic'haouet oute

6. **A reomp**

a-seurt ne chomfe ket sevenadur Breizh
er mirdioù pe a-dreñv prenestri

7. **A Lâr**

eo deuet poent ne chomfe ket pep hini
gant tud e strollad pe e rummad, ha
deuet eo poent kevreañ holl gelc'hioù
levezon sevenadur Breizh

8. **A zispriz**

forzh peseurt distummañ soñjoù politikel
gant ar virourien, ar gilstourmerien hag
an hevelebourien

9. **A Lid**

hor c'houstiañs o vezañ hag o vevañ hor
sevenadur

10. **A c'houlenn**

e vefe adperc'hennet ar sevenadur hag
ar yezh gant an holl, hag adkrouet al
liamm etre an dud



KLASK LOUZOÙ A-ENEP AR DROUKWELLAÑS

BEZAÑ **SELAOUET**

**Treiñ a ran SOT o c'houzout ez eus tud o vevañ en ul lec'h
hep gouzout netra diwar-benn o sevenadur hag o yezh.**

Ar rummad diwan ma 'meus kresket gantañ
n'en em sant ket gouest da zisevel bugale
e brezhoneg : an darn vrasañ en deus ar
santimant n'eo ket gouest d'hen ober, don
o deus d'ober fall, da chom hep gouzout
treuzkas, da nom pas bezañ kad.

frommet on gant-se **ha ne oa ket ar
raktres** diazez pa oa bet krouet diwan.

**AR SANTIMANT DA NOM PAS RANNAÑ KOÑSTAD HA
DISOC'H AN AZEZOÙ GOUDE BEZAÑ KEMERET PERZH. NE
SEBLANTE KET AN TABUD BEZAÑ GWIRION DA VAT
PE D'AN NEBEUTAÑ, BEZAÑ HEÑVEL OUZH
AR PEZH A ZO BET BEVET GANIN.**

*Ar santimant da vezañ bet rediet da
stourm e-pad bloavezhioù e skolioù-meur,
lec'h ma veze nac'het din ar c'hoant da
labourat war danvezioù yezh ha ma vezen
gwelet evel mirelourez...*

Forzh pelec'h ma'z an pe forzh peseurt publik ma m'eus dirazon, e vez traoù a **spont** an dud : ar vouezh, ar sonerezh, ar c'horf : un dra bennak **burzhudus** a c'hoarvez ; un dra dedennus a dremen forzh peseurt talvoudegezh sevenadurel vefe.

**MUIOC'H-MUI A C'HOANT, A
YOU, A VOUILH E-TOUEZ UR
BERN TUD DISHEÑVEL, EUS FORZH
PELEC'H E TEUONT : MAGAÑ A
RA MA STARTIJENN**

**N'EM EUS KET C'HOANT E TEUFE MA SEVENADUR DA VEZAÑ
UN DIGAREZ EVIT BODAÑ FASKOURIEN.**

sevenadur breizh

bev, o fiñval, o cheñch bepred, liesstumm

gallout a ra bodañ kement ha ma c'hell
rannañ an dud, gallout a ra bodañ muioc'h
 eget ma soñjer, zoken tud disheñvel-tre

**UN DOUAR-TEIL DIBAR EO, UR
JOA, UR POUEZ, UR BOAN IVEZ,
UN HERITAJ, UN DOARE DA VEZAÑ
ER BE**



S O

nn ET

An deroù : notenn soñj

?

MA KEMEROMP AR GAOZ, N'EO KET DRE ZEGOU EZH, NA KRENN HA KRAZ : DONT A RA EUS UR FROM HAG A SANTOMP BOUTIN GANEOMP HA GANT UR C'HOANT DON DA EZTEUREL. « NOR », DA LÂRET NI : UR STROLLAD 15 DEN EN EM WEL YAOUANK, BEV, O VEZAÑ O CHOM HAG AKTOURIEN E PEP KORN HOR BRO, ANVET KERNE, E MERVENT BREIZH.

Kroget eo bet evidomp d'un deiziad resis : d'ar 25 a viz Du 2023. D'an deiz-se e oa bet aozet Azezennoù ar Sevenadur hag ar Yezh, e Kemper un intrudu deuet mat. E-kerzh an darvoud-mañ, e oamp niverus o santout ur frailh, spis, gant hor rummad war a seblant. Ar santimant padus hon doa bet da vezañ bet bac'het en ur c'helc'h difrouezh, hep gellet mont kuit. Dont a rae atav ar memes traoù, c'hoazh hag adarre, o ribotañ ar memes randonenn anat hag arguzennoù uzet.

N'eo ket ar pal amañ gwallgomz diwar-benn an araokadennoù gwir tizhet gant ar rummadoù a-raok o stourm, asuriñ eo cheñchet ar bed a c'hallomp avat.

A-benn neuze, e savomp ur vartezeadenn, poent e vefe lakaat war-wel krak ha krenn : ha ne vefe ket deuet poent da soñjal e dazont hor sevenadur en un doare all ?

E-kerzh an darvoud-mañ, e oa bet ur bern divizoù diwar-benn ar yezh. Ar brezhoneg a garomp a-greiz kalon, a gomzomp evit lod ac'hanomp ha gouzout a reomp re vat pegen start eo bevañ en un endro galleger gwaskus. Met estreget ar yezh a zo.

Ne fell ket deomp, amañ, bihanikaat ar wirionez : anavezout a reomp da vat pegen mallus eo mont maez eus ur sistem unyezhek a laz liesseurtes ar vuhez sevenadurel, eus ur stad jakobin a ziviz pep tra e Pariz hag eus un ensavadur dibab tud a zoug d'an ampletusted hag an dudioù. Met evit kaozeal diwar-benn an dazont ha neuze klozañ gant tout-se, ez eus un dra a bouez : diwar-benn hiziv an deiz ezhomm hon eus kaozeal.

Kentoc'h eget chom mut pe fuloret ha bouzar, e santomp an ezhomm boutin da lakaat da selaou ar skiant hon eus prenet. En em vodañ a dalv reiñ da welet hor gwirvoud tud yaouank eus Bro Gerne.

N'eo ket hor pal fougasiñ o kaozeal e anv an holl dud.


En un doare simpl, hor strollad bihan a zo ur skeudenn – e-touez reoù all posupl – eus yaouankiz Breizh, o rannañ o zamm buhez hag ennañ e kaver kalz hevelept, daoust d’an heñchoù treuz hon eus kemeret. Dont a reomp eus lec’hioù disheñvel, met kouskoude e welomp sklaer ur randon : e-kreiz hor buhez emañ sevenadur Breizh. Tud a-youl vat pe gopret emamp, kontourien pe kanerien rapp, div pe teiryezhek ha deuet da vezañ Breizhiz. Pep hini gant e zoare, a ziskouez bezañ o tougañ pep a lodenn eus hor sevenadur.

Hag an dra-mañ, ne c’hell den hon tennañ.

Amzer ar vezh zo achu.

Amzer ar vezh zo achu.

Amzer ar vezh zo achu.



T

R

E I

Ñ

An emsav

D I

Z

E

H

A N

PA VEZ MENEGET SEVENADUR BREIZH,
E KOMZER DIWAR-BENN AR YEZH DREIST-
HOLL, BETEK NE VEFE KOMZET NEMET
DEUS-SE KOULZ LAVARET.

ΔSANTIÑ A REOMP EVEL-JUST EMAÑ
AR YEZHOÙ UL LODENN EUS UN DIAZEZ
SEVENADUREL HAG A-BENN NEUZE, O
DEUS EZHOMM UN EVEZH ISPISIAL ;
KOULSKOUDE, E LÂROMP NE C'HELL KET,
NE ZLE KET, BEZAÑ A-ENEP ELFENNOÙ
ALL AR SEVENADUR.

Daoust m'eo arvarus statud ar yezh, ne c'hell ket bezañ lakaet dirak tuoù all ar sevenadur. Nac'hañ a reomp kouezhañ en droukwellañs, hervez ar pezh a c'hoarvez bremañ.

Lakaat ar yezh e-kreiz ar gaoz pa vez tabutet diwar-benn sevenadur Breizh a zo, deomp-ni, teurel kont eus ul lodenn nemetken, hag a zo paour da vat e-keñver he finvidigezh hollek. Koulskoude eo ar pezh hon eus ar santimant da verkañ.

Kevreañ a ra afer ar yezh kalz a boanioù evit ar rummadoù militanted koshañ, gant gwir abeg. Un totem zo bet stourmed hardi evitañ, pouezus-tre eta. Un tem-spered, ur pennsturienn : « ar yezh da gentañ, ar peurrest war-lerc'h ».

Trist ar re gozh diwar-benn-se ivez, ar pezh a gomprenomp ervat. Penaos chom hep en em santout dibaseet pa n'eo ket bet war-raok an traoù, koulz lavaret, goude bloavezhioù ? Pa vez disprizet ar goulenn sevenadurel gant darn vrasañ an dud peogwir o deus aon eus outi ? Rak pa seblant an traoù mont war-raok, e soñjer chom a-sav.

Dougañ a reomp ivez an heritaj-mañ. Santout, klevout ha gwelout a reomp an traoù evel m'emaint. Un heklev a zo etre hon heñtoù koulskoude disheñvel : anavezout a reomp ar vezh-mañ, an diaezamant, pa vez meneget hon boazamantoù, gant ar yezh hag ar sevenadur.

Rak e 2025, komz, dañsal, krouiñ, bevañ e brezhoneg, n'eo ket anat atav.

Lod ac'hanomp o deus santet warno selloù a-boan madelezes ha fent gante, pa vezomp o dañsal. Selloù spontet, pa vezomp o komz.

Evit tud all, e vo an taol-mouezh an heritaj a vefe mat da zerc'hel, met a c'hell bezañ pounner da sammañ war hon chouk.

A-benn ar fin zo santadur un difenn-hud en endro familh : un tabou a zeu ar brezhoneg da vezañ, hag envel anezhañ a lakfe anezhañ da vezañ evit gwir.

Ni ivez a gendalc’h gant an dismegañs-se o « lonkañ » anezhi, o lemel ar pezh zo dibar ennomp, o tevel hon c’hoantoù, o skoachañ emaomp ar Sevenadur. Dañset, sonet, komzet hon e brezhoneg, hep bezañ emskiant eus pouez an dalc’h. Aotreet eo deomp ar sevenadur-se nemet pa vefe faltaziet, folkloraj, er miridi, d’he skornañ. Ha bremañ pa zeu da vezañ reizh e teu da vezañ ur marc’had rannvroel mat da vouetañ an douristelezh e Breizh, dezhi da vezañ efedus evit Bro-C’hall.

Lakaat ar sevenadur da lezenn, en em aheurtiñ evit ma vefe doujus, plaen ha hoalus zo risklus : gallout a rafe bezañ lemet diganeomp pa vefe bac’het en ur vouest pe a-dreñv ur prenestal, hag eno nemetken he defe droad da vezañ.

Ne roomp ket da grediñ e ouzomp gwelloc’h eget ar re all, na memes lâr ar pezh a zo dleet ober. Kinnig a reomp eilpennañ an urzh en un doare simpl. Terriñ an englozañ, santout ar pezh a vod ac’hanomp, kentoc’h eget ar pezh a zisparti ac’hanomp.

Tout-se a zo un herezh, ur joa, ur boan, un emzalc’h dirak an dud.

Kompren omp hor Sevenadur, hag a-benn neuze n’hon eus ezhomm bezañ kadarnaet gant den ebet all.

Deut eo amzer an emvrud.

Deut eo amzer an emvrud.

Deut eo amzer an emvrud.



T E R

R I Ñ

An degouezh

A R C'HE L
C' H

■'EMAOMP KET O KLASK NAC'HAÑ
REALDED AR ■REZHONEG, NAG E STATUD
A YEZH MINORELET.

■ZHOMM HON EUS LAKAAT DA
DALVEZOUT AR PEZH A YA EN-DRO
KENTOC'H EGET LAKAAT AR POUENZ WAR AN
TU NEGATIVEL, HA PA'Z OMP EMSKIANT
EUS AN HENT A CHOM D'OBER.

Aet omp skuizh e vefe graet un objed da werzhañ eus hor sevenadur. Ne vimp ket an distroperien eus ur gevredigezh en em ziskouez diwirion ha hep hengoun. Ne vimp ket, nebeutoc'h c'hoazh, gwarezourien an dud a cheñch Breizh, he annezidi hag o nerzh-labour en ur pezh mell park tematek, ul labouradeg ramzel kapitalour peotramant un ostel evit an douristed.

Nac'hañ a reomp groñs e vefe renet hor bro evel pa vefe an douristelezh an dazont posubl nemetañ.

Asuriñ a reomp en-dro e fell deomp mont war-zu an nesañ. Deomp-ni eo digor hon sevenadur hag hor yezh d'an holl. Gaouiñ e vefe lâret e vez savet ur sevenadur a-ziwar netra. E kontrefed e fell deomp, bezañ awenet, kemer skouer, meskañ, kopiañ. Netra a gan a-ziwar netra.

Kaout karantez evidomp hon unan, n'eo ket kasaat an Nesañ.

Evel er festoù-noz, lec'h m'en em gavomp, ul lec'h daremprediñ, a liesseurted sokial ha sevenadurel ; m'en en vesk ar c'horfoù, ar spas, ar mouezhioù hag an amzer evit krouiñ ur mare a-istribil, un dra dibar.

Goulenn a reomp groñs e vefe lakaet hor gwirioù sevenadurel hag hol liessevenadurezh e pleustr. Goulenn a reomp ma teuio ar brezhoneg da vezañ en-dro ur yezh rannvroel hep bezañ en arvar, o kenvezañ gant ar galleg. Fellout a ra deomp ma teufe ar sevenadur-mañ en-dro e-kreiz pep ti, e-kreiz pep spered. Ma c'hallfemp adperc'hennañ adarre ar gouiziegezhioù-se. Ma adkavo al lec'h-anvioù o ster. Ma adkavo hor c'hêrioù, hor c'hêriadennoù hag hor c'humunioù oc'h anv hag o distagadur.

Sellit'ta, aotronez, tro-dro deomp, kement a dud yaouank a dap krog e-barzh, a vez leuniet ganti, hag a adperc'henn ar sevenadur-mañ penn-da-benn, o lakaat anezhañ da vevañ ha da vont war-raok. Sed aze ar pezh eo ur sevenadur breizhat a-vremañ, ha n'eo ket ur sevenadur modern.

Ar c'hrouidigezh vreizhat, tro-dro d'an temoù-se a identelezh, gwirioù sevenadurel hag ar yezh, a gendalc'h da vezañ pinvidik kenañ. Hor sevenadur, daoust da vezañ breskaet, a zo bev, liesliv, treuzdanvezel.

Ha disoñjet ho pefe, aotronez, an dañs, ar c'hoariva, ar sonerezh, ar c'han, ar broderezh, ar c'hrouidigezh a-vremañ, meskaj an doareoù hag an estetikoù ? Ha disoñjet ho pefe termenadur ar sevenadur, a zo bezañ o virviñ bepred, bezañ adijinet bemdez gant ar re a zoug anezhañ ? Ha disoñjet ho pefe emañ Breizh o cheñch evel forzh peseurt lec'h er bed ?

Setu peseurt levezonoù a chom deomp neuze ? Marteze ar re aesañ, hag ar re anat anezho holl : komz eus ar sevenadur-mañ, e revendikañ, e adsevel bepred, e veskañ, e ezteurel, e vevañ. A-wezhioù e galleg. Evit ma padfe, dre eskemmoù, dre darvoudoù. Rak ur sevenadur a vez bevet muioc'h eget bezañ lakaet da vezañ, hag n'he deus ket bezañs nemet drezi hec'h-unan ; hep bezañ ezhomm eus kadarnaat ebet digant ur sevenadur galloudus pe pennañ bennak.

Sammañ a reomp warnomp hon unan bezañ plouked ha bevañ an dra-mañ evel un tu-kreñv, ur c'hlemm. Arc'hiñ ha stourmañ a reomp evit kaout an droad da vezañ « plouked ». Ne lezimp ket an doare dismegañsus-se hag hollek dallañ hon entan ; sell kouch ar vegenned, mennozioù hardi diwar-benn petra a rankfe bezañ ar sevenadur, ar memes renkad tud hag a sell a-dreuz evel-se forzh peseurt sevenadur minorelaet e Bro-Frañs.

Dav eo deomp mont dreist ar vezh, da vat ; hag evel-se klask lemel an drougwelañs.

Divizout a reomp eo cheñch-dicheñch hor sevenadur, mezell diouzh an dud, al lec'hioù, an amzerioù. Fier omp o vezañ un darn eus an hollad-mañ brasoc'h egedomp, eus ur gevredigezh a lak ac'hanomp da grouiñ ur spered boutin.

Saludiñ a reomp ar re a gendalc'h da grediñ e-barzh dizehan ha da reiñ eus oc'h amzer. Ar rummadoù nevez hag an doareoù d'ober nevez. Ar re goshañ a gendalc'h da rannañ, kontañ ha treuskas treuzkas.

Pariañ a reomp ouzh ar spi : an afer-se he deus gellet treuziñ an istor, o cheñch, oc'h en em adaptiñ, o vont war-raok. Daoust d'ar reveulzi bras o tont, e c'houestlomp ne cheñcho ket an traoù rak aze e vimp evit ober al liamm.

Emañ ar spi el liamm.

Emañ ar spi el liamm.

Emañ ar spi el liamm.





Disujidigezh !

**Ar virouriezh e
peurvirezh !**

AN DIYEZHEGEZH E PEP LEC'H !

**BREZHONEG HA SEVENADUR BREIZH,
UR REDIÑ ER SKOL !**

**EVIT RAKTRESOÙ
LIESSEVENADUREL GANT DAVEOÙ
DA SEVENADUR BREIZH !**

**Ur vodadenn geodedel !
Ha divizoù arc'hantaouet !**

Kinnigoù digoust !

**BEVET AR FULOR HAG
AL LORC'H !**

ΔΡ ΓWISKAMANTOÙ D'AN TAN
PE D'AR MIRD I !

**EHANOÙ-LABOUR PAEET EVIT
EN EM STUMMAN !**

**ARGAD DA GABITENED
YEZHADUR AR YEZH !**

**stummadurioù integriñ evit ar re nevez
erru hag an dilennidi !**

**DILENNOMP UR ROUE HAG UR ROUANEZ EVIT
KAS WAR-RAOK AR SEVENADUR !**

*Degemer e brezhoneg en holl frammoù
foran !*

**An ostaleri e-kreiz ar raktresoù
politikel ha sevenadurel !**

**TRAWALC'H D'AN AON, D'AN DRISTIDIGEZH HA
D'AN DIZONIDIGEZH !**



P A L L A R M A N I F E S T O - M A Ñ

Δ ZO TREUZKAS LABOUR, PREDER HAG AR GOMZ A-BERZH STROLLAD LABOUR AR RE YAOUANK - « **S**EVEL UR GWELED EUS AR SEVENADUR HAG AR YEZH BREIZHAT E **K**ERNE », GOULENNET GANT **K**UZUL **D**IORREN **K**ERNE, UN AOZADUR KEMER PERZH KEODEDEL STAG OUZH **K**EMPER **K**ERNE **D**IORREN.

EN EM VODET EO AR STROLLAD-MAÑ TOST DEK GWECH ETRE MIZ **G**WENGOLO 2024 HA MIZ **D**U 2025, HEULIET GANT **C**ULTURE **L**AB 29.

« E-pad an emvodoù-se, hon eus kemeret un mare hir, etrezomp, evit eskemm, diwar-benn hor buhez Breizhadezed ha Breizhadiz yaouank. En ur zistreiñ war ar skiant hon eus prenet hag ar fromoù bevet e meur a vare eus hon hentadoù, hon eus gellet lakaat er-maez meur a goñstad. Eus ar c'hoñstadoù-mañ zo deuet war wel an dalc'hoù ha termenet hon eus hor palioù, hag ouzhpenn-se an oberoù a fell deomp lakaat e pleustr.

Ar manifesto-mañ zo unan eus an oberoù-se. Dibabet hon eus e skrivañ er stumm benel, en ur zoujañ ouzh emglev ar muiañ-niver. Ur stumm e galleg zo bet savet ivez. »

Anna Robert, Anne Letailleur, Camille Diquélou,
Clémence Ligen, Enora Bogard, Erell Lahuec, Jeanne Spriet, Kadvaël Jolivet, Ludivine Cruau, Lukaz Nedeleg,
Morgane Lincy-Fercot, Pierre Nozet, Youenn Boulic

MIZ KERZU 2025

Strollad skridaozañ : Jeanne Spriet, Pierre Nozet, Anne Letailleur, Lukaz Nedeleg

Troidigezh (stumm brezhonek) : Camille Diquélou

Sevel grafek : Anne Letailleur

Skeudennoù : Adobe Stock

Ambroug ar strolladoù labour : Culture Lab 29

Moullañ : Cloître Imprimeurs

Niver a skouerennoù : 500

